

YF_0108_Merc'hed Lanuon

Div plac'h yaouank deus Lanuon
Int aet da Wengamp, int aet da Wengamp
Div plac'h yaouank deus Lanuon
Int aet da Wengamp d'ar pardon.

En Gwengamp pa'z int arruet,
Ur chopinad, ur chopinad,
En Gwengamp pa'z int arruet,
Ur chopinad o deus evet.

Pa oa kistion da baeañ
Ne oa ket arc'hant, ne oa ket arc'hant,
Pa oa kistion da baeañ
Ne oa ket arc'hant da gontan.

An ostizez a lavare
Me ho tiwisko, me ho tiwisko,
An ostizez a lavare
Me ho tiwisko be'k an ivin.

Ur paotr yaouank a oa gante
Hag a respontas, hag a respontas,
Ur paotr yaouank a oa gante
Hag a respontas evite:

Gwelloc'h eo din hep ma bragou braz
O biken gwellet, o biken gwellet,
Gwelloc'h eo din hep ma bragou braz
O biken gwellet merc'hed Lanuon en noas.

Kement hini oa er pardon
Hini a c'hoarze, hini a c'hoarze,
Kement hini oa er pardon
Hini a c'hoarze kreiz e galon

O wel' ar paotr hep bragou braz
Hag a valansi, hag a valansi
O wel' ar paotr hep bragou braz
Hag a valansi e reor en noas.